

274

Nevéz oberiou caer  
Napoléon,

(305)

Adalec an 8 a vis Here betek an 8 a vis du 1806, dra bere e contraigno hon  
oll adversourien da ober eur peoc'h profitall evidomp.  
Laget en rim gant F.<sup>s</sup> Guenveur, e Montroulez.

Var ton : Adieu, Pontreou.

Canomp adare, va brois,  
Victorion Napoléon;  
Evel er c'hampagn a dri mis  
En deus grêt entent rêson  
D'euñ all eus e amezeyen,  
Roue Pruss, hanvet Guillou,  
Re ahet gant tromplerien  
D'er gourdrous ouz e armou.

E bried, an noblañz huel ar Lozon hac Alexand  
O deus er forest d'ar brezel a enep e zantimant:  
Ha na rit, eme 'r Rouanez ataqi Napoléon,  
E tremenot evit eur c'hez hoc eur roue digalon.

(306)

Hoc'h arme, hep douetanç ebet, a lavaras ar vanden,  
Pa vo gant Guillou commandet, a ganno ar Francisien;  
Ha ma na ve get galloudus evit ober gementse,  
Digomparoc'h armeou Russ hor zicouro hep dale.

Guillou quèz, dre sempladurez, d'an dromplerien a gredas,  
Ha dre quelen e Rouanez d'hon Haros a ordrenas  
D'ober chenec'h a blaç d'e drouplou gent an eiz a vis Here,  
P'otramant dre nevez e armou contraignet en em velle.

Napoléon a obais, mes en eur fêçon farçus;  
Elec'h o digas var o c'his, e ra dê qerzat var Bruss:  
M'ho ped, habitantet va brô, prestit hoc'h attantion  
Da zelaou pezh caer oberiou en deus grêt Napoléon.

Contraig[er] eo bet adare da vont var e char bompus,  
Evit medi lore neve en douarou roue Pruss.  
Heuillomp eta Napoleon dre blacennou ar gombat,  
O brugarecat a galon Doue eus e zicour-vat.

(302)  
A voengolo c'hoec'h - varnuquent e quittas capital Frans  
Hep gemeret repos en hent ec'h eruas en Mayans  
C'hoec'h - uquent lès en tri de hac ar c'hoec'h a vis Here  
En Bamberg, e penn e arme, Napoleon voa ive.

Eus e lavar : « Mignonet, ret vo d'emp c'hoas combatti,  
D'ober d'hon oll enemiet dont eur veach da zezgi  
Penos mar deuer florissant dre garantez ar bobl vras,  
E gassoni zo mui spontus equet tempest ar mör glas. »

An deiz varlerc'h ma eruas, e teuas eur messajer,  
Pini deän a bresantas cibers roue Pruss lizer,  
Lizer hir hac outrajus c'hoas ; mes ne ras get Lennadur :  
An haros en eur gontantas da glêm e vreur nebeut fur.

Autrou, eme Napoleon, en eur distrei ouz Berthier,  
Hontan zo assination a bini en enorer !  
Evit an eiz, a zo varc'hoas, acquittomp maid hon dever :  
Biscoas Gall deän ne vankas, na voe galvet d'ey ober.

Evel zo eur rouanez coant evit test eus ar gombat,  
Beomp courtes coulz ha vaillant, prim, gracios, disquet mat :  
Evit Sax qerzomp hep dale, na discuis enpad an nös,  
Louisa en penn an d[er]agonet zo re gaer evit gortos.

(308)  
Eus a Vamberg, en nös goude, e parti hon Impaler ;  
An deiz varlerc'h, gent ar c'hreiz-de, voa rentet ar brezeller  
Elec'h m'oa deg-mil Prussien, armet, placet mad, dispos :  
Gent an nös ne voa get unan chommet da zifen e gos.

Mil den, ha pemp cant a gorgou, arc'hant ar brezellidi,  
A voe tapet var an hentchou gant hon re cavalliri.  
An asgel glêi eus an arme, dindan ar marechal Lannes,  
An deg a gombattas ive ; an issu mad voe 1/2 memes.

An troublou var varc'h Prussianet a vouintas penn evit penn :

276

En div heur gant ar re vlesset voe goloet ar blacen .  
 Euy nombr bras a drouplou var droad a dolas en eur palud ;  
 Hac eur Prinç eus ar royal voad en em vel soudey hep tud .

Ar Prinç yaouanc , en dizesper eus o gïelet dismantet ,  
 Corf-ouç . corf a guemer affer eus unan hon zoudarded .  
 Ar zoudard deân lavaras : « Prisonnier pe oc'h maro ! ... »  
 Ar Prinç netra ne respontas , mes gant e zabrey er sco .

Forcet da zifen e rue , hon zoudard a ripostas ,  
 Ha gant ar c'henta tol cleze maro-mic en discaras .  
 Paperiou demeus e c'hodel da c'houzout o deus zoet  
 E voa en penn-cos d'ar brezel ; Doue ?ñ deussân punisset .

Combatjou all a voe bemde (an detaill a ve re-hir),  
 Gant issu mad eus hor c'hoste , evit gouzout en eur quir .  
 Mes se a zo c'hoariellou en gichey batouill Jena ,  
 A vo brudet dre ?ñ oll vroyou entro fado ar bed-mâ .

(309)

Napoléon a voe eno da ziv heur , an drizecvet ;  
 Roue Pruss gant e oll drouplou , tostic d'ê a voa placet .  
 Estlamus voa gïelet ar vro carquet a dri-c'hant mil den ,  
 Gant eiz-cant canon var dreinou , er zariou hac er blenen .

Napoléon , gent combatti , d'ar Roue Pruss a scrifas  
 A feiz vad , evit er pedi d'en em glêvet gantân c'hoas :  
 « An issu mad eus va armeou , erneân , n'en deo douetis :  
 » Distruja ?ñ hoc'h armeou , evel ma ?ñ re ar Russ .

» Evit espern va bugale ne zeus netra ne rafen ,  
 » Bete ne rangin goustoude coll enor va c'huunen .  
 » Ma ellomp dindan ar poent-se entreomp treti ?ñ affer ,  
 » Biscoas ne voay bet em bue qer contant ha qer cedor . »

Mes , dre oll draitourach , Guillou al lizer ne recevas  
 Nemet pa voa bet ar stocou eus ar rusta voe biscoas ,  
 Ha dre bere nerz destumet , dre valiç an ignoranç ,  
 Gant Napoleon voe frottet , vel er scrife dre ?ñ avanç .

Eur spaç eus a c'hoec'h lëo françis a voa gant an armeou ;  
 Napoleon , herves e c'his , a renc e vataillonou .

(310) Entro grad an nôs en o mesq e ro en nep lec'h urzou  
 D'en em brepari d'ur guemesq, evel ma veljet goulou.

Devez bras! notapl en histor, d'hon adversour effreyus,  
 Evitomp devez a enor, a vaillantis difaças!  
 Pa zavjot e voa brumennet, er poent ne velet netra:  
 Hac e vout en enemiñt pa ellas an eol tarza.

An tain a gommanç hep dale er c'kreiz hac er c'hosterjou;  
 Mes ar c'hannoniou a scube goassoc'h equet curunou.  
 Eur rejimant a zaou vil den a deuas en un instant,  
 Gant ar c'henta canonaden eus a zaou vil da zaou c'hant.

Ar gousecanç eus an deiz-man, hac an daou o deus heuliet,  
 En ber gomzou, ceta aman: daou-ugent mil den trapet;  
 Tri-c'hant ha tri-ugent canon; ugent a Generallet;  
 Destimet tri-ugent quiton, ha triegont mil den blesset.

Ceta arme 'r Prussianet, divar pèvar pe bemp de,  
 Gemeret, lazhet, dispennet, evel vije dre urre:  
 Hony hini a boureu ar rest adreus dour, fane, drez ha drein,  
 Pere d'o diouar en em loest, hep sellet adre d'o c'hein.

(311) Marechal Soult, varleri'h Guillou a dec'he gant deg mil den,  
 Ne zelaouas get ar c'hojou eus abers chef ar vanden,  
 Pini nas lavaret dean e voa eun drêv rezolvret:  
 Autrou, eme Soult, n'er c'hredan, rac avis am bize bet.

Goude-ze, ar chef adversour a c'houlennas gueleit Soult;  
 Ar Marechal-man d'an traitour en em disquez leuy a boult:  
 « Marechal, eme 'r Prussian, petra c'houlennit-hu c'hoas?  
 » Finfoultret oc'h eus gant ho tain, d'hon Mestr ger e arme vras.

» Carz hon oll Generallet a zo blesset pe varo;  
 » Ar re n'ho'h eus get rastellet a zo dianget dre 'r vro:  
 » Va Mestr trevers a c'houlennas goude 'r vataill a Jena;  
 » Napoleon a zo re vras evit refusi nep tra..»

Soult a respont d'ar General, p'en devoe peur-echuet:  
 « C'houi barlant evel ar re-all goude ma voent cenclenne!  
 » Rest arme Russ, en Austerlitz a gavas hon larguentez;

278

» Bremañ e tistrio var e c'hiz, hep rêson, enor, na mez.

» Ar brezel oc'h eus disclêriet dre jooiistet a galon,  
 » Hep bea netra gourdrourzet eus a bers Napoleon,  
 » Ober drouc d'êc'h mui a ellin a zo va dever genta;  
 » Hep repos, dea'n e talc'hin, hac hep hoc'h esperm netra.»

Ar Prussian dirzesperet, carzi prest da goll e benn,  
 Flactal virant zo retornet da gaout e dud da Grussen:  
 Ar gombat a zo commancet dre quemer ar vilajen;  
 Mes ar Roue zo achappet gant lod eus ar golonen.

(312)

E bried voa en em dennet er quæter vras eus a Veimar;  
 Plaç pini a zo calz nerzet dre ganomieu var rampar;  
 Mes pa velas ar Francisien o tostet d'e murailloù,  
 E tilojas ar femelen, distrempet en e daelou.

En Rosbac eus eur golonen carzi zo anter-cant vloas,  
 En dismeganz ar Francisien, cannet gant Frederic - Vras;  
 Napoleon en deus laret: « P'hon eus venjet hor brois,  
 » An tour-mañ a vo dispennet, ha savet en quæter Paris.»

Ar victor a zo bet heuillet var 'r mæz couly ha dre 'r c'hæriou,  
 Dre oll en deus-int contraignet da sujedi d'hon armou.  
 Ar quæter gapital a Vunswick eus a galz a ra loden,  
 Couly hac ar quæter vras a Leipsick, batisset en eur blenen.

Evit mont da gapital Pruss hon Haros a scub an hent;  
 Enri ec'h antre triumphi ar c'hoecvete varnuquent,  
 Gant eur bobl founnus eur ar quæter e zo bet complimantet,  
 Oc'h anjar e voa e drec'her brassa Haros zo er bed.

Admiromp ar bale mibin a ra 'n Haros en eur mis,  
 Evit errouet en Berlin, tri-c'hant lèo eus a Paris:  
 Ne veler Haros en Histor, abaoe ma zo scrifet,  
 Oc'h heuillet ger buan ar Victor evel en deus eman grêt.

(313)

Ero Napoleon a laras d'an Duc-Bras, hanvet Nael:  
 « Ho craquez hac an noblanç-vras o deus galvet ar brezel;  
 » Dre ma int bet en em renqet en compoat o Rouanez  
 » Dezi ha dê oll e tleit ho collou, glac'har ha mez.

« D'ho qelen e zôn obliget da ordren d'ho priejou  
 « Da zoigni o ziegezou ha neal o c'heyelou.  
 « Mes an noblans, diempennet en deus grêt qement zroug,  
 « A forcîn da vont da guerzat gant bissacou var o chouc. »

D'ar c'horf municipal a guêr, crouet gant Napoléon,  
 Ec'h ordren ober e zever en peb seurt occasion;  
 Rac pa voe torret prenechou gant Prins Louis-Ferdinand,  
 En derije dleet Guillou e zistruji en instant.

Oc'h ober e bourmenaden, an Haros a dremenas  
 El lec'h ma viret ar zabren a zougue Frederic-Vras:  
 Goude ar c'henta tol-lagad, ec'h assur Napoléon  
 E voa goell gantàn e garad equet uquent milion.

(314)

« Ennes, emeàn, voa dispaq, pa voe 'r Franç dizenoret,  
 « An deiz ma voe, tost da Rosbac, gant Frederic Vras cannet;  
 « Mes p'hoz eus hon affront gueli'ket, m'er c'hasso incontinent  
 « Da jorüssat cos soudardet a voa er vataill present. »

En Berlin e credet bremâ, goude labour qer poannius,  
 Erma 'n arme o c'hehana var diboullou enorus:  
 En em distromplit, mignonet, poursuet en deus bepret  
 Rest hini ar Russianet, qen en deus en destumet.

Bataillou Arcol, Marengo, re Austerlitz ha Lodi,  
 Ne vo de ne vezint ato en memor vad pepini;  
 Mes en ur mis m'eo commencet laera campagn voe biscoas,  
 Nep o devoa o goneet en deus o zremenet c'hoas.

Er mis-se en deus qemeret ouспен eiz-ugent mil den,  
 Hep conta qement zo lazet pa voant eus en em difen;  
 Daouzec-ugent a vanielou, mil officer fanfaron;  
 Ouspen pemp mil a ganoniou, deg milion poult canon.

Grén, pinvidic hac enorus, e voa Guillou diavis;  
 Leti en rentet dinervus, o vea bet re hardis;  
 Pa outrajas Napoléon, alas! n'en d'oa qet sonjet  
 Eo dleet lezel al leon ~~er~~ repos, pa ve couquet.

Destinadur digomprenus, ha qen nebeut gortoet!

280

Cetu êrer dû Roue Pruss gant hini dour Franç merglet.  
 Sottoni Guillou, er quèret, a gontreproez e c'hlac'har,  
 Pa zônj ec'h ell coll eun asqel, marteze diou, beg ha gar.

(315)

An tenerra eus an tadou a veler goude 'r gombat,  
 O louzaoui ar gouliou, eus e zorn o stànca 'r goad!  
 E zaoulagad leun a zaelou, e galon a vadelezh,  
 Bonapart a ro gentellion a bep seurt d'ar rouanez.

Da c'hortoz ar peoc'h deziret, e zeo ret din discuiza,  
 Evidon ne meus get scrifet qement a voa da scrifa:  
 Rac, evit heuil Napoleon dre rim en e victorien,  
 E rencfet primdet Appolon, rimer daer an Doucou.

(Vol. VII, p. 305-315.)  
 strophes non numérotées.